

LODENN GENTAÑ

KROMENN DA ZAOULAGAD

*« La courbe de tes yeux
fait le tour de mon coeur. »*

« Kromenn da zaoulagad
a c'hoari an dro d'am c'halon. »
Paul ÉLUARD

*« Pererin ydw i, ym mhlwyfi dy groen
a'r trefi sydd unlliw â llefrith,
ac yn dawel yr afi'r llanau cudd
gan ddilyn clychau dy waed. »*

« Ur pirc'hirin on e parrezioù da groc'hen
hag ar c'hêrioù a zo liv al laezh
ha goustadik ez in d'an ilizoù kuzh
en ur heuliañ kleier da wad. »

Steve EAVES,
Noethni

War ar parking bihan kelc’hiet gant kleuzioù izel, un dek metr bennak diouzh bord an tornaod uhel, hag un dek munutenn bennak a-raok, o doa lezet e vBMW nevez-flamm, ABS, airbag hag all.

« Penaos e anavezez an holl anvioù-se ? » a c’houlenas Anna, souezhet un tamm anezhi. A-frapadoù berr e teue un avelig-vor freskik da c’hoari lamponig gant he blev melen-aour hir a oa o wagenniñ dreist he sac’h-kein jean a-liv gant he short berr, divorzhed mistr o tiflukañ er-maez anezhañ, un disterig re wenn marteze diouzh doare Anton, met teneraet e oa e galon gant ar pikoù-panez strewet warno a-vil-vern. Ur mell roched ledan ha sklaer en-dro d’he bruched, ur mell penn treset warnañ, hini Mickey Mouse digor e c’henoù war nav eur pemp warn-ugent eus an eil skouarn du ha ront d’eben. Ur souezh da Anton. Ne oa ket kustum da welet Anna gant dilhad a seurt-se ha mil boan en doa bet oc’h anavezout anezhi bremaik pa oa-hi war ar riblenn-straed e kreiz-kêr Brest, e traoñ he ranndi, ouzh e c’hortoz da dremen da gas anezhi d’an aod.

Anton ar Sant, medisin ginekologour e Klinikenn ar C’hoad Du, e Brest, a oa o paouez dibunañ, e doare

ur rozer, anvioù an inizi a welent dirazo o stummañ ur chapeled war gorre ar mor sioul, Benniged, Kemenez, Trielen, Molenez, Balanneg, Banneg, hag Eusa.

« E-giz ma welez, estreget anvioù a denn d'ar gorfadurezh a anavezan, » emezañ. « E gwirionez, n'eo ket ken diaes din anavezout an anvioù-se. Eus ar barrez-mañ on genidik. » Frink-foar e oa Anton un disterañ, betek en e zoare da vezañ dilorc'h. Evit gwir, e oueze mat ne oa ket, e-keñver lec'hanvadurezh, peadra da vont war e zaoulin dirak barregezh e genbarrezianiz a-oad gantañ. E-keñver biertañvadurezh, avat, ne oa ket par dezho. Abaoe m'en doa graet anaoudegezh gant tud yaouank eus Menezioù Pirene a oa gouest da envel gant o anv kement menez uhel ha kement tor dister eus o zolead, e oa savet ur pezhriad revriad mezh ennañ pa ne oueze mann koulz lavaret diwar-benn anvioù an aodoù, ar begoù, an enezennoù, ar c'herreg eus an Arvor, goude ma ne oa ket ar perc'henn nemetañ war an diouiziegezh zon-se. Kerkent ha distro eus e veaj, e oa staget da giañ a-zevri war anvioù-lec'h e vro c'henidik. Evit an anvioù en doa dibunet bremaik, ne oa ket peadra da fougasiñ. War an holl gartennoù e oant moulet, a-wel d'an holl.

« N'eo ket dav mont pelloc'h gant hent ar valtouterien, » emezañ. « Ret eo deomp mont diwarnañ bremañ. »

« Mont diwar an hent ? Met estreget hent ar valtouterien, ne welan nag hent na gwenodenn. » Pezhioù daoulagad glas dezhi o sellet outañ, liv ar brasañ souezh warno, hag un tammig liv ruz-sklaer savet d'he divjod, an dro-vale dindan an heol tomm a oa kaoz, moarvat.

C'hoant a savas trumm ennañ da stardañ anezhi etre e zivrec'h met rankout a reas derc'hel war e zebron a ganas war un ton uheloc'h c'hoazh pa gemeras he dorn munut

ha skañv en e bezhiad hini, ha pa ziskouezas daou vod lann alaouret ha botrelek-kenañ a oa abaoe ur prantadig mat oc'h ober sinoù a zegemer mat dezho dindan flouradenn an avel-vor, un ugent metr bennak diouto :

« Sell. Pellaat a ra hent ar valtouterien diouzh an tornaod. Ni avat a chomo a-hed ar bord. Deus ganin-me plac'h yaouank. »

Hag etre an daou vod e tremenjont. Ne oa gwenodenn ebet ken, war-bouez un tammig roud damguzhet eus ur wenodenn bet, kantvedoù a-raok, marteze. Kantvedoù pe bloavezhioù. Lann ha brug ha drez a oa en em glevet evit goleiñ a-gevret an douar.

Hag a-benn ur pennadig bihan, krafignet dezho un disterig kribennoù ha kofoù o divc'har, e oant en em gavet e penn ur beg-douar uhel. E traoñ an tornaod, e oa un aod-traezh vihan, un hanter-kant metrad hirder dezhi d'ar brasañ-tout, a gase d'ur beg all.

Brav-eston e oa ar gweled. War an tu dehoù, Beg Korzenn, ha war an tu kleiz, Enez Konk, pe Ledenez Kermorvan, e-giz ma vez graet anezhi war ar c'hartennoù, hag ar Gwenndraezh. Tornaodoù serzh hag uhel a-hed an aod, oufoùigoù ha begoù roc'hellek, ha dirazo, chapeled hir an inizi bihan.

« Erru omp. Ret eo diskenn bremañ. Me a yelo da gentañ, » emezañ.

« Ey ! 'Oa ket anv ganit eus alperzh ! Gellet 'pije lavaret din... »

« Ma 'm bije lavaret dit, gouzout a rez, ne vijes ket deuet. Met lavaret 'm boa dit e oa ret degas ur sac'h-kein ha botoù-sport. Arabat mont re bell ganti, memes tra. Diskenn gant un tornaod aes e-giz hemañ n'eo ket alperzh eo. N'eo ket dañjerus, tamm ebet. » Dañjerus,

tamm ebet. Ne voe ket evit miret a soñjal er pezh-c'hoari en doa gwelet un nebeud bloavezhioù a-raok, gant Strollad Plougin diwar-benn an nukleel. Un nebeud bloavezhioù ? Kregiñ a reas da jediñ met spontet gant an disoc'h da zont, e chomas a-istribilh redadenn didruez ar sifroù. « 'Peus ket nemet heuliañ ac'hanon d'ober. Heuliañ pizh, ha lakaat da zaouarn ha da dreid e-lec'h ma lakain va re-me. » C'hoari daouarn, c'hoari louarn, a soñjas etre e chik hag e chouk, pa gejas e lagad gant ar pikoù-panez strewet war divorzhed Anna.

Staliañ ha stagañ ha stardañ a reas he sac'h stok ouzh e hini ouzh e gein. Ha diskenn a rejont goustadik war-draoñ an tornaod, en ur c'hoari gant o zreid hag o daouarn, hep nemeur a vec'h, daoust ma ne oa ket anat. Ur vamm-gozh ne vije ket diskennet ken aes ha tra dre aze. Met Anna ne oa ket ur vamm-gozh c'hoazh, hag Anton ne oa ket en e soñj dont da vezañ unan. Hag a-benn ur pennadig bihan, e voe klevet sarac'h an traezh gwenn ha munut dindan o botoù-basket.

« Kaer-mantrus eo amañ, » emezi.

« Hag ez eo, ya. Ha gwarezet mat diouzh pep lagad. N'eus hent ebet hag a gasfe da vord an tornaod-mañ. »

« Hag hent ar valtouterien ? »

« Kalz pelloc'h en diabarzh emañ hennezh. Morse ne zeu den betek amañ abalamour d'al lann. Aon o devez ar valeerien galonek da grabisat o divc'har kizidik. Hon-unan e vimp ha ne vimp ket direnket. Alies e teuen amañ pa oan bugel. Ur c'hilometr bennak ac'hann edo ti va zud-kozh. »

« Edo ? »

« Edo, ya. Marv eo va zud-kozh. Dilezet an ti, an hanter anezhañ kouezhet en e boull, zoken. »

« N'emañ ket en da soñj reneveziñ anezhañ ? »

« N'eo ket din an ti. D'am breur henañ eo. E Pariz emañ o chom. Morse ne zeu d'ar vro, ha ne ra foutre kaer gant an ti-se, na gant ar vro, na gant ar yezh. N'eus ken nemet daou seurt traoù a gont en e vuhez. An arc'hant. Hag an arc'hant. Gwerzhañ an douar a rafe a-walc'h d'un trafiker douaroù bennak, mar kavfe unan, nemet ne c'hell ket, abalamour d'al lezennoù nevez. Aozadur Gwarez an Arvor, pe ar C'huzul Meur, pe me 'oar-me, an aozadurioù-se hepken a c'hellfe prenañ digantañ. Ha n'eo ket diouzh e zoare ar prizioù a vefe kinniget ganto. »

« Perak 'ta ne werzhfe ket an ti dit ? »

« Opala ! N'anavezez ket va breur, 'm eus aon. O c'hortoz emañ. Gortoz pell, gortoz gwell. Ken a zeuio ur gouarnamant a gredo terriñ al lezennoù a zegas un tammig gwarez war an aod. »

« Gwall bell e chomo da c'hortoz. »

« Gortoz pell, gortoz gwell, pa lavaran dit. Arabat krediñ e chomo gwarezet da viken an aod-mañ. Reuz a sav gant politikerien zo abalamour ma 'z eo re start al lezennoù, sañset. Miret a reont, emezo, da sevel tiez, restaorantoù, kreizennoù-vakañsiñ ha me 'oar-me, traoù evit an douristed. Miret a reont ouzh ekonomiezh ar vro a grouiñ pinvidigezhioù nevez. »

« Digarezioù toull ! Interestoù prevez a zo a-dreñv d'ar c'haozioù-se. »

« Anat dit. Met o tiffraostañ al lanneg emaint. 'Pezh a gont evito n'eo ket ar wirionez eo. An arc'hant ne lavaran ket. Ha pa vo sanket don e speredoù an dud e vir an ekologiezh ouzh ekonomiezh ar vro a vont war-raok, e vo aesoc'h a se an traoù dezho. »

« Met lezennoù zo, memes tra. »

« Gant Mab-den e c'hell bezañ diskaret kement tra a

zo bet savet gant Mab-den, lezennoù hag all. Sell ouzh ar c'hleuzioù. Un arouez int. Na pet devezhiad labour a vez kaset da get bewech pa vez distrujet ur c'hleuz bennak. »

« Opala ! » emezi. « Sed aze prederouriezh marc'hadmat. Sell kentoc'h ouzh an aod hag ouzh ar mor, na pegen kaer int. »

*
* *

Anna. Setu pell amzer a oa en doa c'hoant da ziskouez e aod-traezh kuzh dezhi. Lod o deus ul liorzhiad kuzh. Eñ, avat, n'en doa liorzhiad ebet, nemet an aod-mañ, na oa ket dezhañ ouzhpenn-se. Met den ebet estregetañ ne zeue warni.

Un nebeud mizioù a-raok, pa oa deuet Anna da labourat da Glinikenn ar C'hoad Du, he fost kentañ anezhañ war-lerc'h he studi er skol amiegezed, ha pa oant bet kinniget an eil d'egile gant ar c'helenner Gourlaouen, pennmedisin ha kenberc'henn war ar glinikenn, Anton ne vije ket deuet en e soñj en dije degaset anezhi deiz pe zeiz e traoñ an tornaod-mañ.

Yaouankik-flamm e oa Anna, warni un tres habask ha dibleg war un dro. Selloù glas-sklaer dindan lunedoù ront ha fin a bare enno ur meskaj souezhus a zouster sioul hag a youl pennek. Ur pennad blev melen dezhi dastumet-pizh war he foull-kil. Dilhad sirius betek un hanter re, marteze, ha gwech ebet, moarvat, ne oa bet tañvaet blaz ar ruz-muzelloù gant he diweuz. Tamm ebet memes mod maouez evel ar merc'hed en doa anavezet betek-henn. An neb en dije barnet Anna diwar-nij ha diouzh he doare diavaez en dije lavaret e oa un ordinal-kenañ a blac'h

yaouank, hep perzhioù dreist. Marteze en dije anzavet e oa koantik, hepmuiken. Ne oa ket bet profet dezhi ur gened delwenn eus Bro-C'hres, nag ur c'haerder aktourez eus Hollywood, na zoken hini un aktourez film bruderezh evit ur *chewing gum* bennak. Anton, avat, ne rae ket van. Sachet e oa daveti gant un doare hoalerezh didrec'hus.

Asambles gantañ e oa Anna o labourat, ha ret e oa dezhañ anzav e oa deuet brav-eston ganti. Buan hag aes e teske he micher, ur souezh. Ha c'hwec'h miz war-lerc'h an deiz kentañ, e oa en he bleud da vat, kenkoulz ha kement hag he c'henseurtezed a oa o labourat eno abaoe meur a vloaz. Brezhoneg a oueze, ouzhpenn-se, ha ne oa ket hini treut ha divlaz, ha plijet-bras e oa Anton gant kement-se, evel-just, met gwall-ziaes e veze dezho brezhonegañ dirak tud all gant aon na vije feuket divskouarn kizidik ha gwiridik un divrezhoneger bennak.

Anna, n'eus forzh penaos, ne oa ket techet da gomz kalz. Ha poan he doa oc'h ober anezhañ gant e anv bihan, daoust m'en doa lavaret dezhi azalek an deiz kentañ ne oa ket dav ober "Doktor" pe "Aotrou" anezhañ.

Disheñvel-krenn e oa Anna diouzh kement merc'h en doa bet anavezet. Disheñvel-krenn diouzh Salome, da skouer. Ne oa ket keid-all, hag ouzhpenn ur wech, zoken, e oa deuet Salome asambles gantañ war an aod-mañ. Gant Salome e oa bet profet ar bermuda kampion plankenn-dre-lien a oa en e sac'h-aod. Evit ar fent, rak pa zeuent asambles o-daou war an aod-mañ, n'o deveze ezhomm tamm dilhad ebet e gwirionez. Salome. Un dekenn a blac'h anezhi hag un istor gwall luziet. Klañvdiourez e oa Salome er glinikenn. Ar perzh boutin nemetañ etre Anna hag hi, rak ar c'hontrol-mik eus an eil e oa eben evit ar peurrest.

Un daou vloavezh bennak e oa padet e istor gant Salome. Ne oa fellet na dezhañ na dezhi dont da chom asambles dindan ar memes toenn da vevañ e GAEC, e-giz ma vez lavaret. Ret e oa leuskel bep a dammig frankiz gant pep hini, kea. E doare Jean-Paul Start ha Simone Gweled-Kaer, daoust ma veze hennezh bepred o parañ ul lagad a-dreuz war honnezh.

*
* *

Un nebeud mizioù a-raok, dres p'edo ael an noz o paouez enaouiñ gouleier kêr Vrest, e oa astennet Anton en ur gibellad dour tomm-berv ha klogorennek, diouzh e zoare eta, o lenn gant aked ha plijadur notennoù niverenn ziwezhañ *Al Liamm*. En em gavet e oa gant ul lizher c'hwerv a-berzh ul lenner kintus bennak a ginnige digoumanantiñ abalamour ma kave un hanter re a draoù hudur er gelaouenn, emezañ, hag abalamour ivez n'en doa ket teurvezet rener ar gelaouenn embann ar studiadenn dedennus-meurbet en doa kaset dezhañ diwar-benn buhez sebezus ha kentelius Sant Pantaleon. Ar sant-se, a soñjas Anton, a ranke kaout en e ranndi armeladoù bragoù a bep seurt, re hir ha re verr, re vihan ha re vras.

En un taol kont e tregernas an trepas gant todilhon ar pellgomz. Piv an diaoul e oa ? Ur Charlotte Corday bennak deuet da c'houlenn un emgav prim-ha-prim ?

Pakañ a reas krog Anton en e bellgomzer dineudenn a oa deuet gantañ betek bord ar gibell. Rak dre forzh prenañ skiant marc'had mat pe gwelloc'h, en doa desket ne vefe morse posupl dezhañ mont da gibellañ hep na sonfe ar pellgomzer. Setu abalamour da betra en doa

prenet unan dineudenn, a yae en-dro boutin gant an hini a oa branket en trepas.

Met rankout a reas moustrañ war ul le touet pa verzas e oa aet da hesk ar podoù-tredan a oa ennañ. Unan a zaou, pe mont, pe chom. Gouzout a rae a-walc'h e talc'hfe ar pellgomzer milliget da seniñ ma chomfe er gibellad. Ha ma savfe, e oueze kenkoulz all e tavfe ker buan all an tammig plastik tagnous kerkent hag erruet en e gichen. Petra da ober neuze ?

Chom. Chom a zivizas ober. Setu ma krogas en-dro gant *Al Liamm*. Un niverenn dedennus-tre anezhi, fonnus ha lipous ar boued-spered enni, gant meur a zanevell gant skrivagnerien a-feson, o doa kaset pep a skrid kizellet-brav. Nemet ne oa ket echuet gantañ c'hoazh lenn an notennoù. Gant an notennoù e kroge da gantañ. Da c'houde-se hepken e plede gant al lennegezh.

Evit un abeg a-bouez, evit doare, e oa galvet, rak derc'hel a rae ar pellgomzer da seniñ pennek ha didruez. Ur gwir torr-penn. Dibosupl e oa da Anton en em lakaat da vat gant e lennadenn. Torret e oa dezhañ e blijadur o lenn *Al Liamm* kement hag ar barrad fent a oa o tiwan ennañ o lenn al lizher gant al lenner kintus. Hegasus e oa ton ha son ar pellgomzer. Ne oa ket souezh, rak gantañ e-unan e oa bet programet, ha gantañ e oa bet choazet an trouz displejusañ. Abalamour da vezañ dihunet bep mintin.

« An dra-fall-mañ ne rofe ket ur peoc'h ! » a estlammas. Sevel a reas en e sav, ha kuitaat ar gibellad en ur gas buan-ha-buan ur serviedenn da gantren en-dro d'e gorf ha d'e zivc'har da ober un tammig frot bennak, a-raok lammat war-zu mekanik an diaoul a oa o trouzal diroll a-bouez-penn en trepas.